


TORRET GAND GARANTEZ (1/2)

Komzou : Job an Irien

Muzik : Mikael Skouarneg

♩ ≈ 104



**Diskan : Torret gand karantez, rannet 'vid or yehed,
 C'hwi Jezuz eo bara ar vuez,
 Magadurez Doue evid eur béd nevez,
 C'hwi Jezuz roit deom ho Spered !**

1. Roet 'peus hoc'h amzer
 'Vid an dud kêz, ar re izel,
 C'hwi Jezuz an hader
 A gar péb dén ha péb bugel.

2. Rannet 'peus ho komzou
 Etre an oll, gand madelez,
 Hadet 'peus levenez
 'Lec'h dismegañs ha gwall-gomzou.

3. Roet 'peus ho fiziañs
 D'an dud kollet, d'ar re wasket,
 Hadet 'peus esperañs
 Eur béd a beoc'h, eur béd salvet.

4. Roet 'peus ho puez
 Evidom oll, evid péb dén ;
 Hadet 'peus trugarez
 En or c'halon, evid bemdez !

TORRET GAND GARANTEZ (2/2)

Komzou : Job an Irien

Muzik : Mikael Skouarneg

Tor-ret gand ka - ran-tez, ran-net 'vid or ye-hed, C'hwi Je - zuz eo ba - ra ar vu - ez,

Ma - ga - du - rez Dou - e e - vid eur béd ne-vez, C'hwi Je - zuz ro - it deom ho Spe - red !

1. Ro - et 'peus hoc'h am - zer 'Vid an dud kêz, ar re i - zel

1. C'hwi Je - zuz an ha - der A gar péb dén ha péb bu - gel.

ROMPU AVEC AMOUR

*R: Rompu avec amour, partagé pour notre santé,
Toi Jésus, Tu es le pain de la vie,
Nourriture de Dieu pour un monde nouveau,
Toi Jésus, donne-nous ton Esprit !*

1. Tu as donné ton temps
Pour les autres, les petits,
Toi Jésus le semeur
Qui aime chaque homme et chaque enfant.

2. Tu as partagé tes paroles
Entre tous avec bonté,
Tu as semé la joie
Au lieu du mépris et des paroles dures.

3. Tu as donné confiance
Aux perdus, aux opprimés,
Tu as semé l'espérance
D'un monde de paix, d'un monde sauvé.

4. Tu as donné ta vie
Pour nous tous, pour chacun ;
Tu as semé la gratitude
Dans notre cœur pour chaque jour !